

KIS-822 – Notennoù Keginouriezh VIII – Dafar Geriadur ar Geginouriezh – 3. Skaotañ

(CHAN & YBAN – 07 06 04)

digrizañ

Soubañ a reer buan ar boued en dour berv : e-pad 10 betek 30 eilenn evit al legumaj delioù, tri betek 5 munud evit al legumaj kalet (kaol bleuñv, karotez, irvin, ognon, h.a.) An doare poazhañ-se a vir gwelloc'h perzhioù magus, neuz ha blaz al legumaj, en ur wellaat an ezvoradusted anezho evit ar re n'o gouzañvont ket kriz (strakus e chomont avat). Damheñvelsterioù : redisañ, gwennañ.

gwennañ

Lakaat bouedoù kriz en ardizh gwered dour berv, hep ken tra, sallet pe gwinegret, ha goude o freskaat hag o lezel da ziverañ, kent o dareviñ evit gwir. Seurt gwezhiadenn zo dezhi lies amkan : startaat, distrodañ, ezvevennañ ar reñverad holen, lemel ar puter, kevaraezañ an dibluskadur, bihanaat ec'honad al legumaj. E degouezhioù 'zo e souber ar bouedoù en dour yen a zegaser d'ar berv : avaloù douar, larjezennoù, bidiadoù gwenn lakaet da ziskargañ a-gent, evned porzh, kig hag eskern, riz (evit ezvevennañ an amidon hag aesaat poazhidigezh ar riz dre laezh, da skouer). E degouezhioù all en o zaoler en dour berv war-eeun : kaol glas ha letuz dreist holl. Damheñvelsterioù : digrizañ, redisañ.

redisañ

Termen nes da skaotañ, arveret evit ar boued hepken, kig dreist holl. Da skouer e rediser kig evit e freskaat, pe e rediser stripoù e sell d'o bevezadur. Damheñvelsterioù : digrizañ, gwennañ.

skaotañ

Soubañ ur boued en dour berv e sell da startaat ar gwiadoù, da ezvevennañ ar strodoù a zo war ar gorre, da gevaraezañ an dibluskadur, da deneraat ar gwiennoù pe da ezvevennañ ar puter. Skaotañ a reer ivez podoù kaotigell kent o

leuniañ, evit mirout outo a darzhañ en arbenn eus gwrezverk ar prientad. Skaotañ a reer ivez ar pod te, ar greg.

skaotenn b. -où

Gwastellennig skañv ha strakus, anavezet mat betek an 19^{vet} kantved. Meskañ a reer dour, bleud, ur vi hag amanenn. An toaz a zidroc'her e karreziou pe reizhkornegoù evit o foazhañ en dour skaot. Neuze e lakaer ar gwastilli da ziverañ ha goude da beursec'hiñ er forn. Gwastilli nes d'ar skaotenn eo ar grakilinenn hag ar fouas.

GERVA BREZHONEG-GALLEG

| | |
|--------------------------------------|-------------------------------------|
| ardizh, lakaat en – exposer | kaotigell b. -où confiture |
| berv g. ébullition | kevaraezañ permettre |
| boued g. -où aliment | krakilinenn b. -où craquelin |
| dibluskadur g. épluchage | larjezenn b. -où lardon |
| digrizañ décrudir | magus nutritif |
| diskargañ dégorger | puter g. âcreté |
| distrodañ épurer | redisañ échauder |
| diverañ égoutter | reñverad g. -où excès |
| ezvoradusted b. digestibilité | skaotañ ébouillanter |
| fouas g. -où fouace | skaotenn b. -où échaudé |
| freskaat rafraîchir | soubañ plonger |
| gwastellenn b. -où pâtisserie | startaat raffermir |
| gwennañ blanchir | strakus croquant |
| gwered g. action | strod g. -où impureté |
| gwezhiadenn b. opération | teneraat attendrir |
| gwiad g. -où tissu | |
| gwienn b. -où fibre | |

GERVA GALLEG-BREZHONEG

| | |
|-----------------------------------|---------------------------------|
| âcreté puter | épluchage dibluskadur |
| action gwered | épurer distrodañ |
| aliment boued | excès reñverad |
| attendrir teneraat | exposer lakaat en ardizh |
| blanchir gwennañ | fibre gwienn |
| confiture kaotigell | fouace fouas |
| craquelin krakilinenn | impureté strod |
| croquant strakus | lardon larjezenn |
| décrudir digrizañ | nutritif magus |
| dégorger diskargañ | opération gwezhiadenn |
| digestibilité ezvoradusted | pâtisserie gwastellenn |
| ébouillanter skaotañ | permettre kevaraezañ |
| ébullition berv | plonger soubañ |
| échaudé skaotenn | raffermir startaat |
| échauder redisañ | rafraîchir freskaat |
| égoutter diverañ | tissu gwiad |